

DPM

Kaset gant : Youenn ar Gag ha Fulub Kloareg

Penaos ha war petra e vo labouret ?

Dielfennañ hag anavezout ar perzhioù a ya d'ober muzik ar brezhoneg, diwar glevet ha diwar gomz.

Reiñ da bep hini da glevet e vouezh hec'h-unan o klask produiñ peotramant adober ar perzhioù a zo lakaet war wel diwar skouerioù tennet eus dielloù liesseurt (filmoù, kontadennoù, enrolladennoù dreist-holl...).

Ur roll eus neuzioù fonetik ar brezhoneg hag a vo gwelet ha pleustret mod pe vod warne a c'hallomp reiñ :

- ar sistemoù pouezmouezhiañ e brezhoneg ar gwalarn (KLT), brezhoneg ar vandenn etre (Kgw) ha brezhoneg ar gevred (Gw) : ar perzhioù boutin hag an diforc'hioù.
- anavezout benvegad ar gomz,
- soniadoù ha skrivadoù (lizherenneg fonetikel etrevroadel),
- elfennoù a fonetik,
- distagañ ur vogalenn hir en ur silabenn pouezmouezhiet
- distagañ ur vogalenn verr en ur silabenn pouezmouezhiet, e gerioù unsilabennek ha liessilabennek, e gerioù pouezmouezhiet war an eil silabenn diwezhañ ha war ar silabenn diwezhañ ; kensonennoù gwan, kensonennoù kreñv,
- anavout lec'h ar pouez-mouezh er gerioù e brezhoneg ar gwalarn klasel hag e brezhoneg ar gevred klasel ; ar stropadoù gerioù a zo da vezañ distaget evel ur geriad hepken,
- gouzout pe hir pe berr eo ar vogalenn er gerioù unsilabennek ; sandhi kensonenn/vogalenn ; sandhi kensonenn/kensonenn, etre ar gerioù, etre rannoù ar gerioù e-barzh ur ger kenaozet ; diforc'hioù etre ar skrivadur hag an distagadur er c'heñver-se.
- roll ar sandhioù er c'hemmadurioù diglok en anvioù-gwan war-lerc'h an anvioù-kadarn ;
- ar soniadoù : [e] / [ɛ] / [æ] ; [x] / [χ] / [h] ; [o] / [ɔ] ; hag all hag all...
- an taolioù-mouezh er frazenn...
- An tremen a vras etre ar rannyezhoù (komzet ha glevet) hag ar reizhskrivadur (skrivet ha gwelet). Liv ar brezhoneg diouzh ar rannvroioù.

An holl poentoù-se ne vint ket studiet dre ar munut en ur sizhunvezh evel-just. Traoù all diouzh c'hoant ar berzhidi a vo graet ivez.

EVEZHIADENN : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun. Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù e-giz hemañ ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

Diwallit ! Ar sizhun gentañ ne vo ket labouret da vat war ar gwenedeg : un digoradur d'ar rannyezhezh-se 'ni' vo nemetken. Ar Wenedourien a fellfe dezhe studiañ ar gwenedeg da vat, eo gwelloc'h dezhe bezañ en eil sizhun, ur c'helenner gwenedour a vo neuze.